

D'ar 27 a viz Gouere

- Gouel sant Yoakim, pried santel santez Anna, tad ar Werc'hez Vari.
- Seizh Huner Efezos: seizh soudard eus lu an impalaer Decius e oant, hag int bet mogeriet e 250 e chomjont hunet betek 448. (Lidet e vezont d'ar 4 a viz Eost gant Ilizoù ar Reter)
- E e 303, e Nikomedia e Bitinia, merzherenti sant Pantaleon, e Gresianeg Panteleimon o talvezout an trugareg. Mezeg anarjir, eleze « hep arc'hant », dre ma pleustre e arz evit netra. Miret e vez e Ravello, nepell diouzh Amalfia e Campania en Italia, un orselad eus e wad a zeu da liñvennañ da zeiz e ouel hag a vareadoù all.
- E 432, sant Selest Iañ (Lt Celestius), pab. Ganet e Roma e tremenas ur pennad gant sant Ambroaz e Milano hag e voe diuzet pab. E Senez Efezoz ez embannas mammelezh doueel ar Werc'hez Vari Theotokos.
- E 459, e-kichen Antiokeia e Siria, distro da Zoue ene sant Simeon ar Peulour.
- E 852, e Cordoba (Gl. Cordoue) e Spagn, da vare heskinadeg ar vMaored merzherenti santez Natalia, a-gevret gant ar sent Jorj, manac'h ha diagon, Aurelius hag e wreg Sabigoth, Felis hag e wreg Lilioz.
- E Breizh, e 545, santez Koupaia, ganet war-dro 485, merc'h sant Euzeb ha santez Lanwenn, gwreg Haelog (Hoel, Hewel) Veur, mamm ar sent Tudual ha Luner ha santez Sev, beziet e Langoat e Bro-Dreger m'he doa tremenet he bloavezhioù diwezhañ, er manati renet gant he mab sant Tudual.

D'an 28 a viz Gouere

- War-dro 56, e Milano, merzherenti ar sent Nazer ha Celsius. Ganet eo Nazer e Roma eus un tad uhelgargad en impalaeriezh hag eus santez Perpetua. Gonezet d'ar feiz ez eas da embann an Aviel e Gallia. E Cimiez e-kichen Nice e kejas gant Celsius a chomas e geneil. Goude bezañ bet bac'het div wezh ha dieubet dre vurzhud e tistroas Nazer gant e vignon da vMilano lec'h ma voent dibennet da vare heskinadeg Neron. O c'horfoù a voe adkavet gant sant Ambroaz a roas brud dezho.
- War-dro 198, e Roma, distro da Zoue ene sant Viktor Iañ, pab. Genidik eus Afrika e tivizas e vefe lidet an Dasorc'hidigezh d'ar sul goude Pask ar Yuzevion.
- E 248, da vare heskinadeg Decius ha Valerianus, ganedigezh en neñvoù Merzherion Tebaida. Ijinet e voe boureviadurioù liesseurt evit klask lakaat da faezhañ ar gristenion niverus a roas testenï divrall eus o feiz.
- En IXvet kantved, santez Irenaoz Kappadokea, manac'hez. Ren a reas ur vuhez a binijenn strizh e manati Chrysobalanton e Bythinia lec'h ma teued d'he c'haout evit kaout alioù. Mervel a reas da 103 bloaz miret ganti yaouankiz ar galon.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Samzun, abad hag eskob Dol, mab Ammon Du ha santez Anna, diskibl sant Ildud e Kembre, kenderv s. Maloù ha diazezeur abati Dol, unan eus ar seizh sant diazezeurion Breizh anezho tadoù ar vro. Stourm a reas ouzh Konomor, roue Devnon (Domnonea) o sikour Judual a oa harluet e lez Childeberzh. E genderv Henog hag a oa diagon e Dol a skrivas e vuhez.
- Er VIvet kantved, santez Anna, pried Ammon Du, mamm sant Samzun.
- Er VIIvet kantved, sant Henog (Heneg, Henan pe Tehen), diagon, kenderv sant Samzun a skrivas e vuhez.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Gourgonleslo. Lod eus e relegoù a veze miret gant re sant Samzun en abati Chelles.
- Er VIIIvet kantved, sant Yuzvael, eskob Dol.
- E 1795 e Gwened, er Waremm, e voe fuzuilhet an Aotrou Urbain de Hercé, eskob Dol.

D'an 29 a viz Gouere

- Er Iañ kantved, ganedigezh en neñvoù santez Marta, diskiblez an Arloz, a lider en eizhvetes santez Mari-Madalen. Marta gant he c'hoar Mari hag o breur Lazar a oa mignoned da Jezuz hag e roent alies bod dezhañ en o zi e Betania, tost da Jeruzalem. Hervez an hengoun e vijent bet argaset eus Jeruzalem a-gevret gant diskibled all ha bac'het war ur vag a zouaras e Marsilha war-dro ar bloaz 42. Marta a vez gwelet teir gwezh en Aviel: e pred Betania, e-lec'h ma tegemer Jezuz en he zi, gant Mari e c'hoar; da geñver dasorc'h o breur Lazar, e-lec'h ma tiskler he feiz e Jezuz; hag er banvez kinniget da Jezuz c'hwec'h devezh a-raok ar Pask. E pep degouezh e ro an danevell da welout he roll a vestrez an ti.
- E 303 (pe 297 hervez al Legenda Aurea) merzherenti santez Beatris pe Viatrix hag he breudeur, da vare Diocletianus, e Roma, Via Porto, a-gevret gant sant Rufus. Goude bezañ douaret he breudeur ar sent Simplicius, Fautisnus, e talc'has start d'he feiz daoust d'ar grataennoù ha d'ar gourdrouzoù hag e voe lazhet.
- War-dro 479, sant Loup, eskob Tricasses (Troyes). Ganet e Toul, e oa dimezet d'ur c'hoar da sant Hiler, eskob Arles, pa' z eas da vanac'h e Lerina (Lérins). Deuet da vezañ eskob ez eas e 429 da Vreizh-Veur gant sant Garmon. Evit difenn Ticasses diouzh arfleu Attila e voe dalc'het gantañ e-giz gouestlad-brezel e-pad nebeut amzer hag en devoe levezon vat warnañ. Goude daou vloaz hag hanter kant a eskobelezh frouezhus e varvas e peoc'h an Arloz.
- E 1030, e Nidaros e Norge, sant Olav, roue ha merzher. Embann a reas en e vro ar feiz krsiten en doa kavet e Bro-Saoz hag e stourmas enep an idolouriezh betek bezañ lazhet gant e eneberion.
- E 1099, e Roma, ar gwenvidik Urvan II, pab. Da gentañ diskibl da sant Bruno e Reims ha goude-se manac'h e Cluny e voe diuzet da bab. Kas a reas war-raok an adreizhadur gregoriat hag e embannas ar groaziadeg gentañ e Clermont.
- D'an hevelep deiz an Deg merzher wenvidik Spagn, lakaet d'ar marv e 1936, da-geñver an he-skinerezh e-pad ar brezel keodedel (e Valencia, Joseph de Calasanz Marqués, beleg salesian, e Esplugues, nepell diouzh Barcelona, an tad Egozcuezabal Aldaz, lean eus Urh Sant-Yann Doue, e Calanda, nepell diouzh Terruel, Lucius Martinez Mancebo, beleg dominigat, ar wenvidion Antonio Lopez Couceiro, Felicissime Diez Gonzalez, Saturius Rey Robles, Thyrese Manrique Melero, beleion, Gumesinde Soto Barros ha Lamberto de Navascuès y de Juan, leaned dominigat, hag Emmanuele Alberto Ginés, beleg.)
- E Breizh, er VIIIvet kantved, sant Genevê, abad eskob e Dol, war-lerc'h sant Turiav.
- E Breizh e 1234, sant Gwilherm, eskob Sant-Brieg ha kenbatrom an eskobiezh. Ganet e Sant-Alban e 1180, mab Olier Pichon ha Janed Fortin, e voe beleget d'e 23 bloaz goude bezañ resevet kelennadurezh a-zoare. Abred e pleustras hent ar garitez e lakaio da vezañ ken brudet. Deuet da vezañ eskob Sant-Brieg e 1220 e kendalc'has da sevel an iliz-veur hag e tifennas gwirioù an Iliz e-tal an dug Pêr Iañ "Brizhkloareg". Abalamour da-se e voe harluet e-doug pevar bloaz.
- En Iwerzhon sant Caolan, manac'h.

D'an 30 a viz Gouere

- War-dro 250, e Roma, merzherenti ar sent Abdon ha Sennen. Hag int priñsed eus Persia e tilezjont ar galloud evit degemer ar C'hrist. Da vare trec'hioù an impalaer Decius e voent kaset da Roma lec'h ma voent dic'houzouget dre ma chomjont feal d'o feiz.
- E 303, e Kaesarea Kappadokea, merzherenti santez Julia. Goude bezañ nac'het hep ehan kinnig an ezañs evel ma veze gourc'hemenet dezhi gant ar barnour e voe taeolet en tan.
- War-dro 451 e Kêr-Imola e gêr c'henidik, sant Pêr Krizolog, lesanv o talvezout "Komz Aour", eskob Ravenna. Doazhour eus an Iliz e voe. War skouer an Abostol sant Pêr e baeron, e tegasas en-dro engroeziou e roued ar gelennadurezh eus an neñv ouzh o magañ gant kuñvder Komz Doue.
- E 1540, ar wenvidion Edouarzh Powell, Richarzh Featherstone et Tomaz Abel, beleion ha

merzherion. Doktored war an doueoniezh e Skol-Veur Oxford e savjont a enep d'ar roue Herri VIII a-zivout e dorr-dimeziñ ha goude bezañ bac'het e Tour London e voent barnet da uheldrubarderezh hag e voent krouget.

- E 1943, e Padova, sant Leopold a Castelnuovo, beleg kabusin. Bogdan Mandic genidik eus Kroatia e chomas e kouent Padova dre ma voe nac'het outañ mont da visioniñ dre ma oa bihan-kenañ ha gwan e yec'hed. Lesanvet e voe abostol sakramant ar binijenn ha pa voedistrujet e gouent gant ur vombezadeg e-pad an eil brezel-bed ne chomas en e sav nemet al logellig lec'h ma reseve ar benedourion.

- E Breizh, er IVvet kantved, sant Deved, penitiour iwerzhonat, breur santez Eved. O tont eus Iwerzhon gant e c'hoar santez Eved e reas peñse o bag hag e varvas an holl skipailh nemeto o-daou a zouaras e Penhors e Pouldreuzig er Vro-Vigouden. Penitiour e voe lec'h m'emañ Plozeved bremañ.

- En Iwerzhon, sant Maoltuile, manac'h.

- E 1795, Reuzidi dilestradur Kiberen en o zouez:

An Aotrou Julien Gauthier, beleg didou eus Plelann ;

An Aotrou Jean-Gérard, beleg didou eus Menezalban e Bro-Roazhon ;

An Aotrou Louis-Gabriel Largez, beleg didou eus Louargad e Bro-Dreger ;

An Aotrou René Gilard de Largentel, chaloni ha vikel-vras e Kemper ;

An Aotrou François de Hersé, chaloni iliz-veur Dol en doe heuliet e vreur en harlu e Bro-Saoz, lazhet e voe e 1795 da geñver dilestradur Kiberen.

D'an 31 a viz Gouere

- E 448 e Ravenna, sant Jermen pe Garmon, eskob Autesiodurum, *Defensor Brittanorum*. Ganet er bloaz 380, e oa uhelgargiad an impalaeriezh e Autesiodurum, e c'hêr c'henidik, pa voe dibabet gant ar bobl da vezañ o eskob. En em zispartiañ a reas neuze eus e bried Eustachia hag e tibabas ar vuhez vanac'h. Sevel a reas ur manati a zeuas buan da vezañ ur skol vrudet a santelezh lec'h ma teuas da skouer sant Padrig. Dibabet e voe Garmon gant eskibion Gallia evit mont da stourm enep disivoud Pelagius a rae reuz war Enezenn-Vreizh. E 429 ez eas gant sant Loup eskob Tricasses (Troyes) davet ar Vretoned a ranke d'an ampoent talañ ouzh aloubadeg ar Saksoned hag ar Bikted. Ouzhpenn prezeg ar feiz wirion e kemeras an daou eskob perzh er stourm enep an aloubadeg. Da zeiz Pask e lakaas sant Jermen ar Vretoned da youc'hal a-bouez penn an Allielouia a reas heklev er menezioù, pezh a spontas an enebourion a dec'has hep skuilhañ gwad. Goude ar veaj gentañ-mañ e tistroas sant Garmon d'an enezenn war-dro 444 gant sant Sever eskob Trier. E 447 e teuas d'e gaout un dileuriadur eus Arvoriz o c'houlenn e skoazell: dre m'o doa emsavet enep ar gouarnour Aetius ha skarzhet an amaezhidi roman e tivizas Aetius lezel an Alaned, gant Goar en o fenn, d'ober ar riñs war ar vro. Jermen a yeas davet Goar evit e lakaat da gilañ ha ne dermas ket tapout krog e lêrenn-vrid e varc'h. Hogen e rankas Garmon mont betek Ravenna da gaout an impalaer yaouank Valentinianus hag e vamm an impalaerez Placidia evit gounit ma voe espernet an Arvoriz. Eno e varvas etre divrec'h sant Pêr Krizolog a oa eskob ar gêr. En abeg d'e gefridi evit mad ar Vretoned e voe anvet sant Garmon *Defensor Brittanorum*.

- E 1556, e Roma, ganedigezh en neñvoù sant Ignas Loyola, beleg, diazezeur Keneilezh Jezuz a vez graet Jezuisted an izili anezhi. Ganet e Guipuzcoa e Bro-Euskadi ar c'hreizteiz e vevas da gentañ e lez Kastilha hag ez eas da soudard. Ren a reas ur vuhez amjeestr betek bezañ gloazet hag neuze en em dreiñ davet Doue. Goude ur prantad retred e Montserrat hag e Manresa ez eas da studiañ e Pariz lec'h ma vodas e geneiled gentañ a stalias da c'houde e Roma. Eno e pleustras ur vinistrerezh frouezhus dre e skridoù, pergen ar Pleustradoù Speredel ha dre stummidigezh e ziskibled evit "brasañ klod Doue ha gwazerezh an Iliz o stourm".

- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Nael (Lt Natalis), abad, savour manati Cill na Manach (« Iliz ar Manac'h ») hag e vreur sant Houarneg (Iw. Iarnog), manac'h.

- En Iwerzhon, sant Paban.

D'ar 1 añ a viz Eost

- Kounidigezh ar Seizh breur Makabeed merzheriet e 168 a-raok ar C'hrist e Antiokeia e Siria da vare Antiochus Epifanius dre ma virjont divrall Lezenn an Aotrou harpet gant o mamm evel ma vez danevellet en Eil Levr Merzherion Israel. War un dro e reer eñvor eus ar skrib sant Eleazar a nac'has debriñ ar boued berzet hag a gerzhas a-youl-gaer d'ar boureviadur.
- Gouel Sant-Pêr-Ereet: Kounidigezh eus dieubidigezh burzhudus sant Pêr pa veze dalc'het karc'harier e Jeruzalem (kv Ob. 12). Ereet gant chadennoù, Priñs an Ebestel a veze eveshaet noz deiz gant soudarded. En noz a-raok an deiz merket d'e lakaat da dremen dirak al lezvarn, p'edo Pêr o kousket, en em ziskouezas un ael dezhañ. Ar chadennoù a gouezhas eus e izili hag e voe ambrouget hep skoilh, an dorioù o tigeriñ dirazañ, betek an diavaez. Gant doujañs e voe miret chadennoù an Abostol gant ar feizidi hag e vezont kehelet evel relegoù a-briz en iliz Sant-Pêr-Ereet e Roma. E Breizh e kaver meur a iliz gouestlet da Sant-Pêr-Ereet ha lod pardonioù en enor d'an Abostol a vez lidet e deroù miz Eost, tro-dro d'ar ouel-mañ. En henamzer kristen e oa boazet ar bibion da brofañ d'ar visionerion alc'hwezioù bet goveliet gant metal kemmesket gant un tamm bleud-houarn eus chadennoù sant Pêr. Moarvat eo unan anezho a vez miret e teñzor chapel Sant-Tujan er C'Hab-Sizhun.
- E 375, war enezenn Kitera e Bro-C'hres, merzherenti santez Elisa, lazhet gant kannaded he zad pagan a oa uheliad er Peloponnes.
- E 984, sant Arthewold, manac'h beleg en Avallon (Glad-an-Hañv), eskob Caerwynt (Winchester).
- E 1546, sant Pêr Favre, beleg, keneil sant Ignas Loyola. Genidik eus chadenn an Avariz en eskobiezh Genova edo eus « an tri vignon en Aotrou », eleze gant sant Ignas Loyola ha sant Frañsez Xavier a voe kraoñell kentañ Keneilezh Jezuz Prezeg a reas ar Pleustradoù Speredel dre vroioù Europa hag e varvas d'e zaou ugent bloaz e Roma etre divrec'h sant Ignas.
- E 1787, sant Alfoñs Mari a Ligori, eskob, doazhour an Iliz. Advokad napolitan skedus, e tilezas e vicher evit mont da veleg hag e voe diuzet da eskob Santez-Agata-ar-C'Hoteg e-kichen Napoli. Diorren a reas ur gred difaezhus evit herouezañ ar vuhez kristen er bobl dre e brezegennoù hag e skridoù a-fet divezouriezh pergen. Evit avielerezh ar maezioù e tiazezas Urzh An Dasprener a vez graet "Redemptored" an izili anezhañ.
- E Breizh, war-dro 620, sant Pergad, eskob e Bro-Dreger, diskibl sant Tudual, penitiour e Pouldouran.
- En Iwerzhon, war-dro 480, sant Riokad, abad hag eskob. Ganet eo war-dro 400 eus Konan Meriadeg ha santez Derc'ha. Desavet e vije bet gant sant Gwennole e Landevenneg ha goude bezañ servijet ur pennadig el lu a stourme evit argas ar varbared eus ar vro e wiskas ar sae manac'h en abati. Da c'houde ez eas da Iwerzhon da-heul e eontr sant Padrig e lakaas e penn eskobiezh Inis Bó Finne. Mont a reas da weladenniñ sant Faost eskob Riez hag e tistroas karget gant e oberennoù o tremen dre gClermont da welout e vignon sant Sidoan Apolliner.
- War enez Vreizh (Kembre), e 529, sant Kenez pe Kinoued (Kb. Cenydd, Gg. Kinède pe Quihouet), mab Dinod, mab ar roue Budig, penitiour el ledenez Gouer (Wery), abad er Glamorgan lec'h ma varvas.
- War enez Vreizh, er VIvet kantved, merzherenti santez Almeda pe Alma. He zad a oa roue e Kembre hag e voe hi lazhet gant an hini he doa nac'het dre ma venne mirout he gwerc'hded.
- War enez Vreizh, er VIvet kantved, sant Kidi, penitiour, genidik eus an hanternoz (Bro-Skos) a vremañ, a vevas e Kembre.
- War enez Vreizh, er VIvet kantved, merzherenti santez Eiluned (Kb. Eiliwedd Lt. Almedha pe Elevetha), gwerc'hez, merc'h Brec'han. O nac'hañ reiñ ton d'un tiern pagan e tec'has o klask repu da gentañ e Llan Ddew ma voe skarzhet alese gant ar boblañs ha da c'houde lec'h ouzh lec'h e Llanfilo, e Llechfaen betek erruout e Pen Cevn-y-Gaer Slwch Tump lec'h ma voe degemeret gant aotroù ar vor met adkavet gant kannaded he zud ha dibennet ganto.
- E Breizh, e 1849, distro da zoue ene an Tad Al Leu, beleg eus Keneilezh Jezuz, ganet e Bro-C'hall, desket brezhoneg gantañ e voe misioner e Bro-Wened.

- E Breizh: Kounidigezh Treuzlec'h biz sant Yann Vadezour da Vreizh e 1418. Hervez ar sentvuhezour Alberzh Veur e veze miret ar relegenn e Saint-Jean-de-Daye e-kichen Sant-Lô en Normandia fiziet ma oa bet e santez Tekla da vare ar Groaziadeg. Hogen un archer yaouank genidik eus Plouganoù e Bro-Dreger a oa eno e gwazoniezh un Aotrou eus Normandi hag e vage kalz deoliezh evit ar relegenn. Goude ur veaj marzhus, en em gavas an archer e chapell e gêriadenn anvet Traon-Meriadeg hag eñ o tougenn hep gouzout dezhañ ar relegenn dindan e groc'hen etre kenvell e zorn dehoù hag e vrec'h. An dug Yann IV, bet kelaouet eus an treuzlec'h burzhudus a brofas ur voest-relegenn evit derc'hel an oeñs. Diwezhatoc'h e voe savet ur c'haer a iliz a voe benniget gant eskob Landreger e 1513. E 1506 e teuas Anna Vreizh da birc'hirinañ hag e voe pareet dre vurzhud eus ur c'hoefvadur d'he lagad kleiz.

D'an 2 eil a viz Eost

- Er bloaz a c'hras 257, e Roma, da vare heskinadeg Valerianus, sant Stefan Iañ, pab ha merzher, diuzet e 254 e katakomboù Sant-Kalist ha dibennet eno e-pad an oferenn. Evit ma vefe doujet ouzh unvaniezh ar gristenion gant ar C'hrist degaset dre ar vadeziant ec'h enebas taer ouzh an Afrikaned a gustume badeziñ en-dro an disivouderion a c'houlenne distreiñ d'ar genunaniezh klok gant an Iliz.
- E 371, sant Euzeb, eskob Versell er Piemonte, feizvonnour. Divrall e tifennas sant Atanaz hag e voe forbannet gant an impalaer Constantius evit bezañ embannet dibleg Kredo Nikaia. Goude eizh bloaz en harlu e tistroas d'e sez hag e klaskas lakaat e gloer da ren buhez boutin.
- E 833, e Bro-Saoz, santez Alfreda (Etheldreda), penitiourez. Hag hi merc'h Offa, roue Mersia, e oa prometet da sant Ethelbert a voe drouklazhet p'edo o tont da c'houlenn he dorn. Neuze en em dennas en ur peniti e-kichen manati Crowland bet savet gant he zad.
- E 1868, e La Mure e-kichen Grenoble, distro da Zoue ene sant Pêr Juluan Aymard, beleg. Abostolour azeulerezh an Eukaristia, diazezour Beleion ha servijerezed ar Sakramant Santel.
- E 1936 e Spagn, Merzherion gwenidik Barbastre, lakaet d'ar marv da geñver ar brezel keodedel. Fulub a Jezuz Munariz Azcona, Jean Diaz Nosti ha Leoñs Pérez Ramos, anezho beleion kimi-niaded Kalon Dinamm Mari, bet fuzuilhet gant ar vezinourion, Zeferin (Ceferino) Giménez Malla, Tsigan a strivas da gas war-raok ar peoc'h etre e bobl hag e amezeion; en Hjar, nepell diouzh Teruel, Francisco Calvo Burillo, beleg dominigat; e Madrid, Francisco Tomaz Serer, beleg eus Trede-Urzh Sant-Frañsez.
- Kounidigezh Itron Varia an Aeled en tiegezh frañsezat pergen. Etre ar Iañ da greisteiz hag an 2 betek hanternoz e c'heller gounid hedrugarenn ar Porziúncola anvet Pardon Asizi. Savet e voe nevedan Itron Varia an Aeled gant penitiourion deuet eus Palestina. Dibabet e voe e 576 gant sant Benead evit sevel ur manati stag ouzh hini Subasio. E 1209 e oa rivinet ar chapeleig pa voe adsavet gant sant Frañsez, an trede santual bet adsavet gantañ goude dezhañ bezañ klevet ur vouezh e Sant-Damiano o c'hourc'hemenn dezhañ: "Kae ha sav en-dro va Iliz".
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Tunia (Tunieg, Tunian, Yuniav, Yunieg, Yuninan, Lt. Touiniannus pe Winiacus, Gg. Uniac), abad, diskibl da sant Samzun e Kembre ha da sant Meven war-lerc'h en abati Gwazel; manac'h e Sant-Tewiniav enezadenn eus eskobiezh Dol en hini Sant-Maloù nepell diouzh Sant-Meven.
- War-dro 577, sant Friazh, penitiour e Bro-Naoned, ganet e Bezenez e Bro-Roazhon, keneil da sant Segondel ha da sant Felis eskob Naoned.
- E Kernev-Veur, er VIvet kantved, santez Sidvol, gwerc'hez ha merzherez.
- En Iwerzhon, sant Komman, VI vet kantved manac'h, moarvat un niz da sant Koulmkell.